

(220, suite)

Chanson neverz,
Composet var sujet ar Veleyen.

Var an ton galleg : Du haut en bas.

(221)

Ah ! ça ira,
Dre bêvar c'horn ar Rouantelez,
Du haut en bas,
Tud a ilis, sonjot eta ;
Ma ne g'irrit get chench a vuez,
Disuallit eus ar chanson neverz,
Ah ! ça ira.

An interest,
P'ini ne glasq nemet an arc'hant,
An interest,
D'en em revolti ato prest ;
Ha d'ar veleyen prezantant,
E tlefent expres ober sermant,
O interest.

Beleyen dal,
Deut etoi da brestat ho sermant,
Beleyen dal,
Gemerit exempl ar re-all ;
Ma na g'irrit chench a zantimant,
O pezo lec'h da gasout nec'hamant,
Beleyen dal.

(222)

Bigodezet
Perac o tont da scuilla daelou ?
Bigodezet,
An diaoul zo en ho speret.
O tont da zistruja ar visou,
Na sencher get ar sacramanchou,
Bigodezet.

Na glêvit get,
 Tud carg'et a voal intansion,
 Na glevit get,
 Na sonjal traou en ho speret,
 Pere zo control d'ar relijion,
 Ne reont nemet troublu ho rêzon,
 Heb caout remed.

Sonjit erfad,
 Ezeo evit ho silvidigez,
 Sonjit erfad
 Ezeo evit dont d'or quellat;
 Hag an Assamble leun a fuzez
 A zeu da regli hor goal vuez
 Dre beb sort mat.

(223)

C'houec'h-ug'ent den,
 Goude Atansion hor Zalver,
 C'houec'h-ug'ent den
 En em gavas a gristenien,
 Evit an abostol Mathias
 Henvel en plas an traitour Judas,
 Ar falla den.

En amzer-ze,
 Sant Jages, e ger Jeruzalem,
 En amzer-ze,
 Gant an ol bobl hanvet ive,
 A chomas en ho mesq d'o c'houern,
 Evit instrui d'an dud fidel,
 Lezen Doue.

(224)

Prestiq goude
 Commansamant ar relijion,
 Prestiq goude
 An ebestel a c'houlenne
 Dious pep hini e ompinion,
 Evit reseo dre eleccion
 Escop, cure.

Ivez hirio,
 Tud an Assamble nasional,

Ivez hirio,
 Gant furnez a g'emer o gro,
 Erit distruich ar visou fatal,
 Qen noarzus d'ar bobl e jeneral,
 Partout er vro.

(225)

Gant plijadur
 Me lavaro d'an ol gristenien,
 Gant plijadur,
 Hag oustpeñ ive, m'en asur,
 An darn vrassa eus ar vèleyen
 A gouten dre o le al lezen,
 Gant plijadur.

Tud scrupulus,
 Diouallit da veza glac'haret,
 Tud scrupulus,
 fichet e vec'h de zonch errus;
 Credit da avis an doctoret,
 O deus al lezen examinet.
 Tud scrupulus.

(Vol. I, p. 220-225.)